

KANNAOIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 9 Gouhere - Gwengolo 2016 Priz : 3€

Laikouriezh ha Charia a zo lezennoù diamzeret o div

Diwar lenn pennad-kaoz pajenn diwezhañ ar gazetenn YA ! an 30 a viz Gouhere e oan chomet da brederiañ war ar pezh a lavare an atersad e-kreiz ar pennad-kaoz. Nac'h a rae ar gwir da ober abostolerezh evit ar relijion gristen, en anv al laikelezh !

Neuze ez eo laikouriezh e laikelezh, a soñjis.

Ur mennozhiaid kristen-rik eo mennozhiaid al Laikelezh (*Laicité*), ijinet gant Jezuz ("*Rentit da Zoue pezh a zo da Zoue, ha da Gaezar pezh a zo da Gaezar*"), tra ma-z eo ur mennozhiaid gall-rik hag a-enep kristen al Laikouriezh (*Laïcisme*).

An islam ne c'hell degemer nag an eil nag egile : n'eus ket a frankiz relijiel en Islam. Ar boan a varv a gemenn ar 'relijion'-se pa venn unan he dilezel. Neuze 'ta, n'eo ket a-drugarez d'al Laikouriezh en deus 'Ya' embannet va fennad, na oa diouzh soubenn un darn eus he lennerien 'm eus aon, met a-drugarez d'ar frankiz relijiel, pe d'al laikelezh, a zo ur mennozhiaid kristen-rik. Daoust ma n'emaomp ket mui o vevañ en ur gevredigezh kristen, e chom talvoudenn al laikelezh evel un aspadenn anezhi, met en arvar e vez lakaet en hon amzervezh : gant an Dispac'h Gall hag ar frankvasoned a hiziv a zo e heritourien e penn ar Stad C'hall, gant ar gomunouriezh, gant an naziouriezh, ha gant an islamouriezh neuze 'ta.

Hent ar frankiz priziusañ evit Mab-den eo al laikelezh, ar frankiz donañ, personelañ : ar frankiz relijiel, ar frankiz soñjal, ha ne zeu ket tamm ebet diouzh al laikouriezh, a zo relijion ar Stad C'hall da voustrañ war ar relijion gristen abaoe 200 vloaz. Met ar meni relijion-se war an tu gin n'eo ket efedus war an islamouriezh dre ma ne zegemer ket an ideolouriezh all-se an

disparti etre tachenoù ar "speredel" hag an "douarel" a zo kristen e orin, se am eus diskouezet uheloc'h.

Islamouriezh ha Laikouriezh, groñsveliouriezhioù ez int o-div. E miz Eost ez eus bet kalz anv eus ar «Burkini». D'ar 25 a viz Eost, Rudy Salles, eil-vaer Nisa, ha

kannad UDI an Alpes Maritimes, en doa respontet d'ar c'helaouenner E. Stourton war *BBC Radio 4* a c'houlenne outañ daoust hag-eñ e talvez ivez evit al leanezed an dezvad a-berzh e Guzul-kêr :

– Ne vint ket aotreet (al lenaezed da zougen dilhad o urzh) : ar memes tra (hag ar burkini) ez eo.

Ur wech ouzhpenn eta e weler mat ez eo, koulz hag an Islam, diamzeret al laikouriezh c'hall. E Douarnenez, e-pad gouel ar filmoù a c'hoarvez bep bloaz e dibenn miz Eost ez eus bet maouezed o vont d'an aod hag o kouronkañ dilhad hag all evit ober al lu ouzh berzhidigezh



ar Burkini, met gant abegoù fall, d'am soñj, evit lod¹.

Pezh a rebechan dreist-holl ouzh al laikouriezh ez eo e nac'h ar pezh a bled gant kreizig-donañ kevrin mab-den. Rak ar relijionoù eo a ginnig respont da gevriñoù orin ar bed, reiñ ur ster da vuhez mab-den, d'an droug a zo er bed, d'ar marv ha kalz traoù all ouzhpenn. O zachenn arbennik ez eo. War an holl poentoù-se e chom boud ar brederouriezh, pe emaint dirazo evel kelien o sellout ouzh gouloù ur c'hleuzer-straed. O tisteurel reizhwiriegzh ar relijionoù e tifoupont neuze dre ret war an dizouedegezh, ha da heul ar geñverelouriezh, an netraouriezh... hag an emlazh. Red-preder Sartre eo, ent-anat.

Setu dres ar pezh a c'hoarvez er mareoù-mañ : 218.800 buhez babiged a zo bet graet an dizober anezho e Frañs e 2015. Evel-se, lavaret gant gerioù dichipot, ra vezin digarezet, ur babig war bemp a vez lakaet d'ar marv bep bloaz e Frañs. E-keit-se ouzhpenn 300.000 estren-europad o deus enbroet. 3 milion oc'h ober dek vloaz. Da vihanañ. E 2005 e oa bet un emsavadeg feulstre, ouzhpenn 100 takad emsavet er bannlevioù. Hag ar wech a zeu ? Ha neuze bremañ, piv a gred ez eo "mat" lakaat da zont e Frañs tud a vilionoù, ken disheñvel diouzhomp, hag ouzhpenn gant ur relijion a c'houlenn ma vo graet ar brezel ouzh ar Gristenien, gouez da Zaech ?²

N'eo ket evit netra ez eo priziet mat-tre ar relijion gristen, a zo an hini gentañ er bed. Relijion ar garantez an hini eo. "*Doue 'zo karantez, en em garit an eil egile evel m'em eus ho karet*". Petra a c'hell bezañ dreist d'ur reolenn-vuhez evel houmañ ??? Ha perak ne vije ket ar gwir gant neb a garo he embann, da ober abostolerezh, ma kar ? Mellad kentañ bonreizh Stadoù Unanet Amerika war ar gwir-estaoliñ n'emañ ket evidomp. Bez ez eus kalz a draoù a zo berzet ouzhimp e karc'har Frañs hag a denn d'ar frankiz kentañ-se en tu all d'ar meurvor.

Meur a dra all a garfen ouzhpennañ, da heul drouklazh euzhus ur beleg kozh, troc'het e c'houzoug dezhañ e-kreiz an Oferenn, evel un

¹ A-du e oa darn eus ar re-mañ gant ar monokini, avat, en anv ar frankiz : gwazh a se evit an elevez eeunañ... Evit gwir e oa gouleviet an darvoud-se gant ar Planning Familial, en anv "gwirioù ar merc'hed" !

² An Islamourien a lavar e ranker lenn da skouer ar Sourat 4, hag e-touez re all, niverus 4.91 diwar-benn ar "Gevrederien" (ar re a lavar ez eus tri ferson a-gevret e Doue) "*o fakit, hag o lazhit e kement lec'h m'o c'havot*".

oan lidlazhet, e-harz e aoter ouzhpenn, un aoter ma vez lidet ar Garantez warnañ abaoe ouzhpenn 1500 vloaz.

E supermarc'had ar relijionoù ez eus teir a zo dreist d'ar re all, hep mar ebet. Ar prederour Aristoteles, 300 vloaz a-raok ar gristeniezh, hag hep dezhañ anavezout mat ar relijion yuzev o vezañ ma ne oa ket troet c'hoazh ar Bibl e gresianeg (Septuaginta), en doa diskouezet en e «Brederouriezh kentael» ne oa ket bastus al liesdouedegezh : ma-z eus eus Doue, an horolojer bras ma karer, ez eo unan³ dre ret.

Me 'laka ez eo unan eus an abegoù o deus broudet ar vaodiernez c'hall Vallaud-Belkacem, dalc'het ganti he faperioù a vroadelezh varokat, hag ezel eus kuzul roue Maroko, diskennad ~~ar bugeloria~~⁴ Moc'hamed, da reiñ taol ar marv d'ar gresianeg ha d'al latin en hor skolajoù ha liseoù deomp-ni adalek distro-skol ar bloavezh-skol-mañ.

Ar skiantourien war an islam a oar mat ez eo diwanet an Islam diwar ur sektenn kristen a venne ober ur seurt kendastum etre ar Yuzevegezh hag ar Gristeniezh. Kontrol d'ar Gristeniezh, e chom ar Yuzevegezh hag ar Vuzulmanegezh, o-div, relijionoù diazezet war ul Lezenn, war ul levr gourc'hemenoù, reolennoù strizh da sentiñ outo evel ma sent ur mab d'e dad. Sentiñ d'e dad a zo mat⁵. Met un deiz e rank ar mab kompren ster al lezenn evit ma ne zeufe ket ar roll-reolennoù en deus da sentiñ outo da vezañ dic'houzañvadus. Sant Paol a zispleg mat an dra. Ned aer ket da Zoue dre al Lezenn. Diamzeret eo Testamant kozh an Aotrou Doue Barner ha Kastizer. En hevelep doare ez eo diamzeret-krenn ar Charia ivez. Reolennoù diskiant ez eus eno o-div. Diwar-benn Lezenn ar Sabad en deus diskouezet Jezuz pegen lu e oa pa

³ Dre an Diskleriadurezh Kristen, ec'h ouzomp-ni Kristenien ez eo Doue karantez, ha ganti ez eo klok en E ziabarzh, peogwir ez eo kumuniezh a garantez : An Tad a gar ar mab a respont d'e garantez, en un doare ken souezhus ma-z eo ar garantez-se hec'h-unan kevrin trede ferson an Drinded Santel : ar Spered Santel. Solwezel eo ar garantez e diabarzh Doue, n'eo ket mui ul liamm etre daou zen, bez ez eo fetis. Fetis. Ken eeun ha tra !

⁴ Hadith Sahih Mouslim 2547. Dimezet en doa gant Aicha, 9 bloaz, a oa c'hoazh ganti he foupinelloù. Setu perak e oa bet lakaet da nav bloaz an oad izelañ d'ar merc'hed evit dimeziñ gant an ayatollah Khomeyni.

⁵ Met ne blij ket d'hor mistri, a zo frankizelourien c'hwegonteizhat arloupet ha n'o deus ket c'hoazh "kac'het" o yaouankiz, respet deoc'h. Dre se eo e klasker diskar aotrouniezh an tadoù hag ensavadur an tiegezh dre a bep seurt doareoù.

ziboanie an dud d'an deiz-se evel d'an deizioù all⁶.

Setu ar pezh a zisklerias Kadoriad Egipt, Al Sissi, daou vloaz 'zo, da Nedeleg, dirak uhelidi Skol-Veur Al Azhar e Kaero : Er-maez eus ar Garantez n'eus tu ebet da reiñ ur ster da lezennoù an div relijion-se.

Aze-dres emomp gant Evan-gelios Jezuz : e Geloù-Mat, e «Destamant» Nevez. Lavarout a ra "*N'on ket deuet evit diskar al Lezenn*". Deuet eo evit reiñ an alc'hwez, "*skañv he yev*", ar Garantez.

Kompren a ran en defe bet gortozet Doue emled ar bed hellenat-roman, ha pergen e vefe bet diazezet mat eno ar gresianeg evel kenyezh uhel he live, ha ma vefe ledet mat a-walc'h troidigezh an Testamant kozh e gresianeg, a-raok en em ober den da zisplegañ deomp pep tra. Un taol-mestr a gelennouriezh a welan aze : a c'haoliad etre Egiptiz Afrika, Persiz Azia hag ar bed Gresian-roman en Europa en deus kemeret war-dro 1300 vloaz evit degas ar Yuzevien da gompren tamm-ha-tamm evit petra eo graet an den : evit karout. Seblantout a ra ken anat deomp ! Met an Istor Santel a grogas fall-tre : gant breur-lazh Abel gant Kain !

Hag ar Yuzevien n'o deus ket komprenet. Diskennet eo ar Mesiaz diouzh o zren ha n'o deus ket e welet war kae o zi-gar. Gortoz a reont anezhañ atav abaoe. Pegen trist !

Hag ar Vulzulmaned n'o deus ket komprenet. Aesoc'h eo bet kavet sevel ul levr sakr gant lezennoù da sentiñ outo, e servij an dud a c'halloud d'an ampoent. Nag a dud a c'houzañv dindan ar relijion-se ! Ha neket hepken ar merc'hed n'o deus ket gwirioù kevatal d'ar wazed...

An Aotrou Krist, Jezuz, en deus roget gouel an Templ. Adalek neuze emañ aze Jezuz evit an holl, ar Yuzevien koulz hag ar pobloù lesanvet

⁶ An Aotrou beleg Troal, Doue d'e bardono, bet ganet e 1925 pe se, e Tregenneg, a gonte penaos e oa berzet outo goro ar saout da Sul. Neuze e vezent goroet diwezhat da Sadorn... hag abred-tre da Lun. «Lezenn ar Sul» a oa strizh rak aesoc'h eo sentiñ strizh ouzh gourc'hemennoù Doue ha re an Iliz eget kemer ar riskl da bec'hiñ o klask ober diouzh hon tammig soñj hon-unan. Skoemp e seblant ar gudenn bezañ eta, met eeun-tre eo evit gwir : sentiñ ouzh al lezenn 'zo sentiñ ouzh Doue, met ret eo dere'hel mat soñj ez eo graet ar gourc'hemennoù evit deskiñ karout. Sentiñ ouzh ar gourc'hemennoù hep ar garantez, n'eus ster ebet d'an dra-se. Setu aze ar pezh a gelennas Jezuz d'ar Yuzevien.

«Pagan». Hag abaoe ez eo ar Gristeniezh he deus froueshaet Sevenadur ar Sav-Heol betek donedigezh an Islam, ha Sevenadur ar C'huzh-Heol he deus roet frouezh dispar er Grenn-Amzer ha roet he diazez d'ar gevredigezh Kornogat betek an Dispac'h Gall. An Dispac'h Gall an hini eo he deus ijinet mennozhiaid al laikouriezh, hag he savet d'ar gorreoù e-giz ur wir relijion.

Al lezennoù laikour avat, evel lezennoù ar charia pe re an Testamant Kozh, a zo yen ha diamzeret, abalamour ma-z int re zifetis. Brav eo war ar paper met un den a zo unan. Ne c'heller ket padout atav hep diskleriañ e feiz d'an dud en-dro deor. Natur eo komz eus ar pezh hol laka da vevañ. N'eus droug ebet gant se !

Ar si brasañ a zo gant al laikouriezh arloupet ma vevomp enni ha ma vez levezonet «Ya» hag «an Emsav» ganti eo e tegas kasoni etre an dud : o rediañ ar Gristenien da chom hep lavarout o feiz, hag o voustrañ war boazioù estren ar Vuzulmaned⁷, ez eus ur gasoni dianzavadus ouzh ar Gristenien, a-berzh hor mistri hag a-berzh al lodenn gounezet gant an Dispac'h Gall e Frañs, pe gant kredennoù ha kredouriezhioù all, hag e sav kasoni a-berzh ar Vuzulmaned pa n'emañ ket en o stuzegezh dispartiañ "*ar pezh a zo da Gaezar diouzh ar pezh a zo da Zoue*". Eeunik a-walc'h, e lavaront emañ pep tra da Zoue hag ez eo broudet evel-se an Djihadourion da gas hor c'hevredigezh da get da ziazezañ an hollvelouriezh islamek, evel m'emañ kont en holl stadoù ez eo diazezet o lezennoù war charia an Islam. Er c'hontrol, en ur bed kristen, ez eo kalz skañvoc'h yev ar relijion, netra nemet dre ma anavez ar frankiz relijiel (ne c'heller ket rediañ unan da grediñ !!), mennozhiaid an ingalded (holl gwitibunan omp karet ingal ha dreist gant an Aotrou Doue), hag ez eo evit deskiñ karout eo ez omp deuet war an Douar. Frankiz, Ingalded, Breudeuriezh⁸, talvoudoù ar Republik ? Ya, met ganti an talvoudoù-se o deus kollet o maen korn, aet int e belbi. Hag ar maen korn-se a zo an Aotrou Krist : "*Me eo an Hent, ar Wirionez, hag ar Vuhez*". War Doue graet den eo diazezet hor relijion, ha n'eo ket war Lezennoù yen hag amsklaer ar ster anezho alies.

⁷ Evel Kristenien ez eo un dever a garitez kristen sikour ar beorien estren. Met e par ur riez-stad ez eo risklus-tre «Ne c'hellomp ket degemer holl dienez ar bed» eme Rocard ...

⁸ Iskis eo e vije anv a Vreudeuriezh gant tud dizoue : penaos 'ta bezañ breudeur pa nac'hont kaout un Tad en Neñvoù ?

Un dra all na wel ket al laikourien : den n'en deus roet biskoazh e vuhez evit al laikouriezh. N'eus nemet tri zra a dalv ar boan e vefe aberzhet hor buhez dezho, peogwir o deus muioc'h a dalvoudegezh eget hor buhezioù : Hon tiegezhioù, hor bro⁹, ar relijion. An tri zra-

⁹ Komprenet evel hon tiegezh er ster ledan, ha n'eo ket ur gumuniezh mennozhioù evel ma venn mistri Frañs e vije : e-pad an dispac'h gall e oa bet roet ar «vroadelezh (kentoc'h e rankfed komz a geodeouriezh)» c'hall d'an dud estren o doa mennozhioù an Dispac'h. «*Tout étranger, qui sera jugé par le Corps législatif avoir bien mérité de l'humanité - est admis à l'exercice des Droits de citoyen français.*» (mellad 4 Bonreizh 1793). Un den evel Jean-Jacques Rousseau da skouer a oa keodedad eus Genève e

mañ, gant izili Emglev An Tiegezhioù a zo sklaer, met kalz a dud bremañ, en Emsav zoken, eta, n'int ket mui evit kompren. Evit un abeg hepken a-benn ar fin : an tri-zra-mañ, mat ha naturel, a zo bet lakaet an hu warno gant an holl meziennoù abaoe ar brezel diwezhañ. E Frañs, an teir zachenn-mañ a zo deuet da vezañ tachennoù-brezel, a-dreuz emgannoù evel Lezenn Taubira (tiegezh), ar Brexit (broadelezh), ha Daech (relijion).

T. Gwilhmod

Bro-Suis, ma vije bet bev d'an ampoent, sur en dije bet ar geodedouriezh c'hall.

Sklaer e vez distaget ar pezh a veizer mat...

“Sklaer e vez distaget ar pezh a veizer mat, hag aes e tegouezh ar c'homzoù evit henn lavarout”

Nevez 'zo ez eo deuet en-dro war va eñvor ar frazenn-se, bet desket deomp gant hor mestrskol gwechall er skol c'hall, ur frazenn a adlavare alies pa oa bec'h gant unan ac'hanomp evit ezteurel e soñjoù pe evit displegañ un dra bennak. Eus ar skrivagner gall Nicolas Boileau (1636-1711) e teue ar frazenn-se, mar ne fazian ket. Hiziv an deiz hag abaoe un toullad bloavezhioù ez eus ivez ul lavar disklaer aratozh gant ar bolitikerion hag ar meziennoù. Deuet eo se war va spered goude bezañ lennet ur pennad digant Henri Guaino, bet kuzulier Nicolas Sarkozy, ha kannad gall LR e departamant an Yvelines. Bez' e skrive a-zivout ar Brexit er sizhunieg *Valeurs actuelles*, niv. 4153, 30/6 – 6/7/2016, p. 90 : “*Ret eo paouez da zroukveskañ Unaniezh Europa hag Europa. Bez' ez eo Europa un douaroniezh, un Istor, ur sevenadurezh, a hanveze¹⁰ a-raok Unaniezh Europa, hag a hanvezo war he lerc'h. Ur vro europat e chom ar Rouantelezh Unanet er-maez Unaniezh Europa*”. En ur lenn an dra-se em eus soñjet ne oan ket an hini nemetañ o kavout e oa un doare kemmesk gant an termennoù-se hag e vefe kentoc'h an UE a baouezfe da vezañ europat mar c'hoarvezfe dezhi degemer Turkia en he c'hreiz pa n'eo tamm ebet ur vroad europat, nag a-fed poblañs nag a-fed sevenadurezh. Ne-d eo mui endev ken-se europat pa vez degemeret en Europa, kantadoù

¹⁰ Hanvezout : *exister*.

miliadoù a enbroidi o tont eus Afrika, Reter-Nesañ hag Azia. En Euro melldroad 2016 e oa ur skipailh turkiat o c'hoari e-barzh, ha mar ne fazian ket, mar bije bet diuzet e vije bet skipailh Israel.

Gant piv emañ ar gwir

Emañ ar gwir gant Henri Guaino hag un toullad tud a zo ali gantañ, hogen ar meziennoù, ha dreist-holl ar c'helaouennoù, skoret brokus gant ar c'hellidoù foran, da lavarout eo gant arc'hant ar c'hevrozourion¹¹, a lavar ar pezh a fell d'ar re a bae - gant arc'hant ar re all -, e vefe lavaret. Hag evit ar re a ren war Unaniezh Europa hag ar re a zo ali ganto n'eus nemet ar broioù a zo e-barzh an Unaniezh-se a zo europat, ha na pet gwech e vez klevet digant kelaouennerion ar skinwel anv eus kudennoù en darempredoù etre Europa ha Rusia evel pa ne vefe ket ar Rusianed Europiz ivez. E-keit-se e vo annezidi enez Mayotte pe re eus enez Réunion kensellet evel Europiz en abeg ma-z int Gallaoued a-fed keodedouriezh ha ma-z eo Bro-C'hall ezel Unaniezh Europa. Kement-mañ ivez a ra din soñjal en hor Breizh, mac'hagnet gant an holl gouarnamantoù gall gwitibunan, o deus distaget Bro-Naoned diouti, evit krouiñ ur rannvro kevanaozel gant tammoù tiriadoù all distaget diouzh provinkoù gall. Evel-just e oar ar gouarnament gall ar pezh a ra, pa glask divrezhonaat al lodenn-se eus Breizh, ha ma vez kelaouennoù, skingomz, skinwel, oc'h heuliañ an hevelep doareoù korvigellek. An amoetañ a zo marteze gant ar skinwel pa vez un darvoud

¹¹ Kevrozour : *contribuable*.

bennak o sellout ouzh Breizh a-bezh pa glevomp digant an hini a gomz : “*La Bretagne et la Loire Atlantique*”. Pa vez konoc’hadeg¹² e Bro-Naoned evit gouzout pet a dud a zo a-du evit adunvaniñ Breizh, ez eus bet kavet meur a wech war-dro 70% eus ar boblañs a-du, hogen an hevelep tud-se, o deus lavaret e felle dezho gwelout Breizh adunvanet, a ankounac’haio o ya da Vreizh en ur gaozeadenn gant tud all, ha Breizh a chomo ar vro-se en tu all d’ar Stêr Winun, peogwir ez eo merket evel-se er gelaouenn a lennont, er chadenn-skinwel a sellont outi, dreist-holl mard eo anvet rannvroel¹³. Ar meziennoù e servij politikerion c’hall ar mare o deus graet o labour divrezhonaat, ar pezh a wirieka ar c’hrennlavar : “adlavaret kant gwech, e teu ur gaou da vezañ ur wirionez”.

Ur wirionez all gwallgaset

Ur wirionez all a vez gwallgaset gant ar meziennoù hag ivez lod politikerion, ez eo Europa gristen. Ne gomzan ket evel-just eus Europa-bremañ peogwir ez eo war-nes bezañ digristenaet a-grenn, hogen eus Europa betek kreiz an ugentvet kantvet. Ent-wellek¹⁴ ez eo bet Europa kevandir ar Gristeniezh, ha daoust da se ez eo bet nac’het gant renerion Unaniezh Europa menegiñ an dra-se e Bonreizh an UE, dalc’homp soñj eus komzoù an arlevier gall Jacques Chirac : “Ken muslimat ha kristen eo Europa”. En un dazont tost e c’hellfe c’hoarvezout an dra-se mar ne zihunomp ket diouzh an teoghun ma-z omp bet lakaet ennañ, hag e c’hellfe Europa dont da vezañ muslimat penn-da-benn zoken, mar ne zigoromp ket bras hon daoulagad ha mar ne reomp ket ar striv da ersaviñ¹⁵ buan. Evel-just ne vank ket ar gouskederion, betek ar pab Fransez en em c’houlenne, en e areizh dirak kannaded an UE e Strasbourg, ha ne oa ket “trevadennouriezh nevez” komz eus “Europa kristen”.

Atav eo bet darempredoù Europa gant ar bed muslimat darempredoù a geñveriañ nerzhioù, pa vezomp taget dizehan gantañ. Dalc’homp-soñj eus Spagn bet dindan yev ar Vuslimiz e-pad eizh kantved, ha dieubet diouto da vat gant

¹² Konoc’hadeg : *sondage d’opinion*.

¹³ Ha mar fell dezho memestra sellout ouzh an abadenn vrezhonek nemeti a zo ne vo ket tu bremañ gant ar skinwel HD, ret e vo deoc’h tremen dre ur box Internet.

¹⁴ Ent-wellek : *par excellence*.

¹⁵ Ersaviñ : *réajir*.

Ferdinand Aragon hag Izabell Kastilha (ar Rouaned katolik) e 1492 nemetken gant kemeridigezh Granada ar c’hreñvlec’h muslimat diwezhañ. dalc’homp-soñj eus seziz Gwenvon, kêrbenn Aostria, e 1529 ha 1683 gant an Durkiz ottoman, hag eus ar broioù aloubet ha bazhyevet ganto e-pad pell evel Hungaria, Serbia, Bosnia, Albania, Gres, Bulgaria... Soñjit el laeroned-vor barbaresk a zraste dizehan aodoù mor Kreizdouar ar C’hornog, hag aodoù kreisteiz Bro-C’hall, ne voent ket espernet ganto.

Tonket e oa da Europa bezañ kristen

Tonket e oa da Europa bezañ kristen adalek prezegerezh Jezuz hag e vez lavaret sklaer an dra-se gantañ en e barabolenn eus “**ar Winierion Vuntrerion**” (Mazhev 21; 33-45). Doue an Tad eo perc’henn ar winienn, ar Yuzevion eo ar winierion fallakr, karget da ober war-dro ar winienn, hag a wallgas hag a lazh ar servijerion kaset daveto, evel ma veze gwallgaset ha zoken lazhet ar brofeded kaset gant an Aotrou Doue da bobl Israel. Hag ez eo Jezuz, mab perc’henn ar winienn kaset da ziwezhañ hag a vez lazhet gant ar winierion, a zerc’houez ar Yuzevion. Kentelius eo er c’heñver-se ar werzhad 21; 43 : “*Setu perak e lavar an deoc’h e vezo lamet diganeoc’h Rouantelezh an Neñvoù, hag e vo roet d’ur bobl all a dud a raio dezhi dougen frouezh*”. Ar bobl-se a voe dreist-holl pobloù Europa ha da gentañ re Impalaeriezh Roma ha treuzkaset e voe kreizenn ar Gristeniezh da Roma. Gant kimingaded¹⁶ ezvodet diouzh an Impalaeriezh-se hag e voe kristenaet Europa a-bezh, ha diwezhatoc’h e voe kimingaded europat a gaso an Aviel dre bevar c’horn ar bed : Amerika, Afrika, Azia, Okeania, ha kimingaded vreizhat o deus kemeret ur perzh bras en abostolerezh-se. Neuze lavarout ez eo Europa ken muslimat ha kristen, a zo diwir ha diskiant evit chom hep lavarout gwashoc’h. Kalz rebechoù a zo bet graet da C’hoursened Vatikan II, met d’an nebeutañ ez eus bet disoc’het un dra vat dioutañ e keñver al lennadurioù a vez lennet e-kerzh an oferennoù : tric’hementet eo bet niver al lennadurioù tennet eus an Testamant Nevez hag e vezont ledet war dri bloavezh e-lec’h unan hepken a-raok. Neuze, parabolenn ar Winierion Vuntrerion a vez adkavet bep tri bloaz. War-lerc’h al lennadurioù e vez peurvuiañ prezegenn ar beleg awenet gant lennadurioù ar Sul, hogen

¹⁶ Kimingad : *missionnaire*.

biskoazh n'em eus klevet prezegenn beleg va farrez awenet gant stêr ken hewel ar barabolenn-se, evel pa vije bet berzhet gant pennadurezhioù ar Vatikan lavarout un dra bennak a c'hellfe feukañ pe gourtamall¹⁷ ar Yuzevion, goude ma oant bet pedet da lavarout o ger er Goursened-se ha da vezañ levezonet lod mat eus an diskleriadurioù anezhañ. Ne zle ket Europa bezañ tour-tan ar Gristeniezh ken, ha siwazh he deus selaouet mouezh strobiniellus ar morganezed a gane ouzh he divskouarn, hogen emañ en arvar da vezañ kastizet d'he dro gant an Aotrou Doue evel Israel er bloaz 70, pa voe distrujet Jeruzalem gant legionoù roman Titus, dre ma oa bet disfeal d'ar gefridi bet fiziet enni.

Aloubidigezh Europa keñveriet gant aloubidigezh Roma gant ar Varbared

Da geñver aloubidigezh Europa gant lanvezh divent ar repuidi o tont eus Afrika pe eus ar Reter-Nesañ, ez eo bet keñveriet an darvoud-se gant aloubidigezh Impalaeriezh Roma gant ar Varbared¹⁸, ar pezh a zo bet abeg he ziskar, a-gevret gant atebeion politikel ar mare e Roma o doa dibabet en em lezel da vont gant an holl blijadurezhioù a zegase dezho ar pinvidigezhioù dastumet evito gant o zadoù. Lennet em eus ur pennad e-barzh ar magazin *Famille Chretienne* niv. 2015, ma veze aterset daou gelaouenner a zielfenne hor saviad a-vremañ. En un doare bennak e c'heller lavarout ez eo, tamm-pe-damm, hor saviad-bremañ - gant hor begennoù europat gounezet-holl d'ar gealiadurezh bedelour, zoken re an Iliz -, heñvel ouzh saviad Impalaeriezh Roma tost ouzh he dibenn. Savetaet e voe koulskoude hêrezh Roma gant an Iliz, kristenaet e voe tamm-ha-tamm an holl Varbared-se a-drugarez d'un Iliz frammet start, ha diogel en he feiz, a-dal da veuriadoù a azeule meur a zoue, hogen dreist-holl dre ma oant pobloù europat (indez-europat, mar fell deoc'h) evel ar Romaned, ar C'hallianed, ar Vrezhoned..., ar pezh n'eo ket heñvel gant ar re a aloub Europa er mare-mañ, Muslimiz start en o feiz evit an darn vrasañ anezho, a wel an

¹⁷ Gourtamall : *stigmatiser*.

¹⁸ Dont a ra ar ger « barbar » diouzh al latineg "barbarus", amprestet digant ar gresianeg hag a dalveze "estren", "diavaeziad".

Europiz evel difeizidi lous ("kouffar" en arabeg), gant stuzioù breinet, dirollet. Lavaret en deus ar pab Fransez e oa gouest Europa da enteuziñ al lanvezh treuztiriadel-se evel m'he deus graet gant meur a aloubidigezh all ; bez' e eilgerie unan eus an daou gelaouenner n'eo ket da aotrouniezhoù an Iliz da reiñ an niver a enbroidi a c'heller degemer, war zigarez e vefe karitez kristen. Ya, evel-just, rak se e vefe kroufañ¹⁹ war damani Kaezar, evel ma vez degaset da soñj deomp gant an Aviel : "Rentit da Gaezar ar pezh a zo da Gaezar ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue" (Lukaz 20:25). Muioc'h eget-se ez eus gant emzalc'h an Iliz hiziv e-keñver an dreuztiriaded. Abaoe Vatikan II hag an diskleriadur *Nostra Aetate*, ez eo koulz lavarout kevatal ar relijionoù, neuze n'eo ket bet klasket kanttreiñ ar Vuslimiz a zegouezhe dizehan da Vro-C'hall ha da Gornokeuropa, abaoe hanter-kant vloaz gant an Iliz, difennet eo zoken o c'hanttreiñ, evel ma 'm eus klevet digant an Tad Michel Viot, bet aluzener-prizon e Blois etre 2004 ha 2014. Goulennet e oa ouzhomp, emezañ, o skoazellañ hepken, da heuliañ mat o relijion. Un diforc'h bras ez eus etre stad an Iliz e dibenn Impalariezh Roma, ha stad an Iliz bremañ. En em zaskor a ra d'an enebour a-raok stourm. Neuze n'eo ket ar Vuslimiz a vo kanttroet d'ar feiz kristen, hogen ni a zeuio da vezañ Muslimiz, seul vui ma vez goulennet dizehan ouzh ar feizidi degemer mat an enbroidi e-kerzh oferenoù ar Sul, ha zoken ar pec'hed bras nemetañ a chom c'hoazh e lavar an Iliz modernour a zo chom hep degemer mat an enbroidi. Ez eo bepred al lavar-se e prezegerezh an Iliz war-lerc'h drouklazh an Tad Hamel e St Etienne-du-Rouvray ha reuzidi Nissa. Ar brouenn eo n'eo ket dibikouzet c'hoazh daoulagad ur bern tud. Petore gwalldaol skrijusoc'h c'hoazh a zleomp gortoz neuze evit o dibikouzañ da vat ?

Donwal Gwenvenez

¹⁹ Kroufañ : *empiéter*.

Merzher an Iliz katolik pe merzher an denelouriezh hollvedel ?

Souezhet on bet gant ar birvilh bras a zo bet er meziennoù en dro da zrouklazh ar beleg kozh

Jacques Hamel, dic'houzouget e kerzh an oferenn a lide en iliz-parrez St Etienne du

Rouvray en Normandi, e-kichen Rouen, gant daou djihadour an Islam, a voe lazhet d'o zro gant ar gêrreizh. Edo poblañs Bro-C'hall o paouez bezañ skodeget mik gant drouklazh 85 den e Nisa gant un djihadour all en doa taolet ar sammgarr a vleine war yoc'had an dud, a oa deuet mall warno da welout tanarvest ar gouel broadel gall, war "Pourmenadenn ar Saozon" e Nisa. Eikont pevar den lazhet, flastret dindan rodoù ar sammgarr muntret e-korf un nebeut munutennoù, hag unan all diwezhatoc'h, en ospital. Sabatuet e voe an holl gant kement-se-all a dud drouklazhet, ha tud all mac'hagnet, war urzh ar Stad Islamek, war-lerc'h ar 130 lazhet d'an 13 a viz Du 2015 e Pariz, hag ar re lazhet e miz Genver 2015 e Charlie Hebdo, ha tud all lazhet a-unanoù e lec'hioù all. Ha setu a-daoltrumm, un nebeut deizioù war-lerc'h, ur beleg kozh drouklazhet d'e dro gant daou vuslimad, en un doare euzhus, doare anavezet an djihadourion, en e iliz, p'edo oc'h oferennañ, hag ar meziennoù gall o tilezel reolennoù al laïkouriezh santel d'hor beuziñ tost e-pad ~~ur~~ pemzektez dindan un disac'hadeg keleier war an darvoud marvantrek-se. Da veure, da greisteiz, d'abardaez, e veze komzet eus drouklazh an Tad Jacques Hamel. D'an ampoent e oa "Devezhioù-bed ar Yaouankiz" (JMJ e galleg) e Polonia, e Krakovia, hag an darn vrasañ eus an eskibion c'hall a oa aet du-hont, evit ambrougañ ha sterniñ re yaouank o eskobiezh. Bez' e voe an digarez evit mont d'o atersiñ war drouklazh ar beleg kozh. Bez' e voe ivez tro ar pab da vont da gKrakovia, ha da reiñ e veno war an drouklazh, met aterset war ar feulster islamek pa oa er c'harr-nij war hent an distro da Roma e souezhas ar Gatoliked pa zisplegas ne felle ket dezhañ komz eus feulster islamek rak neuze e vefe ret dezhañ komz ivez eus feulster katolik ma oa anv anezhañ bemdez er c'helaouennoù en Italia. Daoust pe zaoust, ez eo iskis memestra an ersav-se digant penn ar Gatoliked !

Unan eus va c'hoarezed, hag a zo o chom e Naoned, a zeuas d'am gwelout e derou miz Eost, hag evel-just e voe komzet ganeomp eus darvoudoù ar mare, ha drouklazh ar beleg Jacques Hamel a zeuas er gaoz. Lavarout a ris dezhi e kaven dreist-muzul a-walc'h ar birvilh-se, an turmud-se, er meziennoù war an divoud-se, da lavarout un tammig digevatal evit un den drouklazhet nemetken : ar beleg, e-keñver an eikont pevar den drouklazhet e Nisa. Ha va c'hoar da respont din : "Ya ! Hogen ur beleg ez

eo, hag evit an dud, lazhañ ur beleg, hag ouzhpenn en amveziadoù²⁰ ma-z eo bet lazhet, n'eo ket evel lazhañ un den ordinal bennak. A-hent-all e tiskouez an ersav-se n'eo ket marv ar relijion gatolik e spered an dud. N'eus ket kement a dud o pleustriñ an Iliz evel en hor yaouankiz, met pa c'hoarvez darvoudoù evel an drouklazh-se, e teu soñj dezho ez int kristen memestra hag e fell dezho henn diskouez".

Edo ar gwir ganti marteze, met un dra a anoaze va spered memestra : pa oa bet ludresadennoù eus Moc'hamed er gelaouenn *Charlie Hebdo*, e voe manifestadegoù divent ha feuls e pep lec'h er broioù muslimat ha kristenion a voe drouklazhet gant muslimiz dichadennet, iset gant o fennoù relijiel. Daoust ha traoù heñvel ez eus bet digant an Iliz katolik e Bro-C'hall ? N'eus ket bet ! Tamm ebet ! E-gin-kaer ez eo bet pedet ar Vuslimiz da zont niverus d'an ilizoù da ziskouez e felle dezho difenn ar "bevañ a-gevret". N'eus ket bet kalz a feizidi katolik evit diskouez o enebiezh ouzh seurt pedadenn, "mentrezhet"²¹ ma-z int gant an Iliz modernour, abaoe Vatikan II.

Mard eo ret d'ar Gristenion karout o enebourion evit heuliañ gourc'hemennoù Jezuz a zo merket en Aviel, n'eo ket evit kadarnaat ar Vuslimiz en o gwanderioù, en o fazioù, en o zorfedoù zoken. Mar fell deomp karout an enebourion-se ez eo ret deomp, neket prezeg dezho ur "bevañ a-gevret" daerawus ha pilpous, hogen o deren da glask ar wirionez. Hag hor goulenn groñs kentañ a rank bezañ : "Lennit 'ta ar C'horan hag an haditoù", evel ma voe goulennet gant e gamalad-soudard kristen ouzh an Irakad muslimat Mohamed Al-Moussawi, a c'houlenne digantañ reiñ dezhañ an Aviel da lenn. "Lennit da gentañ ar C'horan en e bezh, a respontas dezhañ, ha da c'houde e roin deoc'h an Aviel da lenn". Studiañ pizh a reas ar C'horan e-pad pemp miz hag a-benn ar pemp miz-se, e oa kendrec'het ne c'helle ket ar C'horan bezañ komz Doue, ken heuet e oa bet gant ar pezh en doa dizoloet e-barzh. Ha goude bezañ keñveriet gant an Aviel e fellas dezhañ dont da vezañ kristen, daoust pegen arvarus e oa henn ober evitañ er metou ma veve en Irak. Ret e voe dezhañ kuitaat e vro goude-se – emañ bremañ e Bro-C'hall o chom -, gwreg ha bugale gantañ, ha kemmet en deus e

²⁰ Amveziadoù : *circonstances*.

²¹ Mentrezhet : *formaté*.

anv, Joseph Fadelle²² eo e anv bremañ, ha skrivet en deus ul levr – *Le Prix à payer* - evit kontañ e istor hag e imbours'hadenn a feiz, ha broudañ e vreudeur muslimat da ober hevelep degerzh²³ hag eñv da zizoleiñ ar wirionez.

Evel-just ne voe ket anv eus an dra-se en iliz-veur Rouen da zeiz obidoù an Tad Hamel – a voe lidet gant an Aotrou Lebrun, arc'heskob Rouen -, ma oa azezet er renk kentañ, kichen-hakichen Mohamed Karabila eus moskeenn St Etienne-du-Rouvray, ar rabin Michael Bitton, Bernard Cazeneuve maodiern ar c'hravezioù, Laurent Fabius kannad kozh norman, hag Herve Morin prezidant kuzul-rannvro Normandi. An arc'heskob, o c'hervel gant izili ar gloer yuzev, muslimat ha kristen da greñvaat ar gengrediezh²⁴ etre ar relijionoù, a drugarekaas ar Vuslimiz evit o merkoù a genhoal²⁵, ar pezh a oa evitañ ur c'hammed bras war-zu ar pal-se. Ne voe ket diskouezet ar beleg dic'houzouget evel ur merzher eus ar feiz katolik, met eus “sevenadur ar garantez”, evel ur doare reuziad kengostezel²⁶ eus ar “bevañ a-gevret” meizet fall, ha zoken e zrouklazherion evel reuzidi kollet en ur gevredigezh ne raje ket plas dezho. Koulskoude e oa sklaer diouzh o ferzh e oa buket ganto an Tad Hamel evel beleg katolik, arouez ar relijion argarzh - ne oa bet lazhet den all estregetañ -, hag e zic'houzougerion o doa taolet outañ (gouez d'ar c'hoar Roseline) an anaoue-mañ : “*Ne c'hell ket Jezuz bezañ den ha Doue, emañ ar gaou ganeoc'h*”. Bez' e ouient mar-tre petra a rebech ar Vuslimiz d'ar Gristenion : bezañ “kevredourion²⁷” (“*mouchrikoun*” en arabeg, liester “*mouchrikin*”), da lavarout eo krediñ en Drinded Santel, ar pezh ne reont ket-int, hag a vez eztaolet en o *Chahada*, Kredo ar Vuslimiz : “*N'eus doue all ebet estreget Allah*”. Ur relijion ma-z eo un nac'hadenn he fedenn bennañ ez eo an Islam, ha ma vez he feizidi o kendaoniñ d'an ifern ar re na gredont ket evelto : “*Lavaret o deus ar Gristenion : “Mab da Zoue eo ar*

Mesiaz”. *Ra vint kaset da get gant Allah : N'eus doue all ebet estreget Allah* ” (S. 9, 30). Peogwir ez eo ar barrletad²⁸ dibardon krediñ en Drinded Santel, evit ar gwir Vuslimiz - “*Ne bardon ket Allah ma vefe roet dezhañ kevredourion, endra ma pardon an holl bec'hedoù nemet hennezh*” (S. 4, 48) -, ez eo tonket ar Gristenion d'an ifern, neuze hol lazhañ n'eo ket ur muntr met sentiñ ouzh gourc'hemenoù Allah. Diaes eo goude-se da amwelout²⁹ ur “bevañ a-gevret” seder, ar pezh n'o deus ket paouezet Kristenion ar Reter-Nesañ d'hor gouzaviñ, met skouarn vouzar a ra pennadurezhioù an Iliz en Europa ouzh ar wirionezenn-mañ.

N'eo ket an dra-se a oa e prezegennoù en iliz-veur Rouen. Ar pezh a oa mat gant Jacques Hamel, n'eo ket e oa beleg, met e engouestl e meur a gevredigezh eus ar c'horn-bro, er c'hengomz etre-relijiel, ma vez an arouez hewelañ, an dachenn e-lec'h ma voe adeiladet ar voskeenn, a voe roet gant ar barrez d'ar Vuslimiz. Lennet em eus pennad ur c'helaouenner a restadenn an obidoù, ha sachet eo bet va evezh gant an doare ma konte penaos en doa gwelet war rakleur an iliz-veur ur barrezianeaz oc'h adkavout ur vignonez kozh dezhi, muslimadez, hag en ur reiñ pokoù start dezhi a estlamme : “Spontus eo da lavarout, met ret e oa marteze d'an dra-se c'hoarvezout, evit haeriñ a-nevez gant nerzh al liammoù etre ar c'humuniezhoù relijiel”. Stervarnerezh iskis a-walc'h e-lec'h e teu “bevañ a-gevret” ha “sevenadurezh ar garantez” da vezañ evel gwenn ha melen ur vi, o prientiñ en un dazont berr-peverroc'h ur relijion nevez, denelouriezhel, agnostek hag anbongoalek³⁰, gant bennoz ar frankvasonezh, hogen diskrediñ a ran war asant ar Vuslimiz, nemet e vefe diouzh o ferzh un tamm brav a *dakiya*.

Yann MIKAEL

²² *Le Prix à payer*, Joseph Fadelle, L'Œuvre éditions, 224 pajenn, 18 € Savet eo bet ivez ur video gant an Tad Henri Pagès, ma tispleg enni petra eo an Islam. Kontet eo bet e istor en ur pennad e Kannadig Imbourc'h 66, 2010 : *Priz ur gantroidiezh*, gant Tiernvael.

²³ Degerzh : *démarche intellectuelle*.

²⁴ Kengrediezh : *solidarité*.

²⁵ Kenhoal : *sympathie*.

²⁶ Reuziad kengostezel : *victime collatérale*.

²⁷ Kevredurion : *associateurs ; qui associent d'autres personnes à Dieu : Jésus et Marie (exit ar Spered santel)*.

²⁸ Barrletad : *blasphème*.

²⁹ Amwelout : *envisager*.

³⁰ Anbongoalek : *adogmatique*.

Da betra e servij an armeoù europat ?

D'al Lun 29 a viz Eost e oan chomet kousket dirak va skinweler, pa zihunis a-daol-trumm : tremenet e oa hanternoz abaoe un hanter eurvezh, poent bras e oa mont da gousket ! Warnes lazhañ ar skinweler, setu ma krog ur skingasadenn nevez : ur restadenn war ur "staj kommando" evit ofiserion yaouank an arme c'hall, tu bennak er Pireneoù. Diouzh Kamp Koedkidan e Breizh e teue darn eus an ofiserion-se, bez' e oa ivez un ofiser alaman hag unan all senegalat ha div vaouez a oa en o zouez. Gortoz a ris un tammig a-raok lazhañ, un nebeut munutennoù, doare da welout eus petra e oa keal, hag ivez un tammig evit gwelout penaos e oa bremañ gourdonadur ar soudarded, daoust ha disheñvel e oa diouzh an hini a oa em amzer-me pa oan bet en arme c'hall. Bez' e oa bet kemennet "Staj Kommando", neuze e tleje bezañ un tammig disheñvel diouzh gourdonadur ar soudard ordinal, hogen ar pezh a welis a skoas from ennon. Ne oa ket an embregadurioù o-unan a oa arbennik, daoust ma n'em boa graet biskoazh un darn vat anezho, hogen dreist-holl an tizh ma teuent lerc'h-ouzh-lerc'h, koulz e-pad an deiz hag e-pad an noz. Ne veze ket lezet d'ar stajidi amzer da ziskuizhañ, n'o doa ket kousket ouzhpenn teir eurvezh e-pad sizhun ar restadenn, ur gwir kellusk ifernel. Pal ar staj a oa bountañ ar stajidi betek penn o nerzhioù hag o bred³¹, evit bezañ diogel, ma-z afent betek penn an holl amproennoù, e oant barrek da c'hourc'hemenn soudarded er stourm, da gemer buan an disentezioù-ret evit en em dennañ diouzh ar saviadoù diaesañ. Spisaet e oa e oant gourdonet gant ofiserion o doa stourmet e Bosnia hag e Kosovo. Meneg an div dachenn-vrezel-se en Europa a reas din ersaviñ kerkent, rak an disoc'h anezho, gant bennozh an OTAN, ha lod gouarnamantoù europat, a oa bet staliañ, en daou lec'h-se, gouarnamantoù muslimat, hag ar saviad mantrusañ a oa, hep mar ebet, hini Kosovo ma oa bet argaset Serbiz diouzh o bro evit lezel an dachenn da Albaniz muslimat, a glaske brasaat o ziriad diwar goust o amezeion. A-benn un hanter eurvezh e lazhis ar skinweler hag ez is da gousket, met ne gavis ket ar c'houssket diouzhtu, rak ne baouez ket ar pezh am boa gwelet er skingasadenn da zont en-dro war va spered.

³¹ Bred : *psychisme*.

Antronoz, pa selaouis ar c'heleier, e voe keal eus janglenn Calais, e Norzh Bro-C'hall, ma oa bremañ war-dro 10.000 treuztiriad bodet eno, hag a felle dezho mont da Vro-Saoz, ha 100 treuztiriad nevez a zegouezhe bemdez. Bemdez e veze treuztiriaded oc'h arsailhañ ar sammgirri evit mont e-barzh ha diraez Bro-Saoz evel-se. Distremenet gant an darvoudoù e oa an archerion kaset evit herzel ouzh an dra-se, ne oant ket niverus a-walc'h. Tud Calais, hegaset-tre gant ar janglenn-se, hag a ra d'an douristed saoz tec'hout diouzh o c'hêr, ar pezh a vegozh ar genwerzhourion da serriñ o stal a-benn nemeur, a c'houlenne evel-just ouzh ar Stad ober un dra bennak evit ma vefe paouezet buan gant ar saviad-se. Klevout a ris un annezad eus Calais aterset, o lavarout : "Peogwir n'eus ket archerion a-walc'h evit talañ ouzh ar saviad-se, perak ne vez ket galvet an arme evit hon difenn, aloubet ez omp gant estrenion memestra ?" Soñjal a ris en teul-film em boa gwelet e-pad an noz hag en em c'houlenn a ris : Ya ! Da betra e servij gourdonnañ gourbrezelourion mar ne servijont ket d'hon difenn ?

En hevelep deiz pe an deiz war-lerc'h e voe anv eus treuztiriaded all, o tont eus Libia, berniet a-vil-vern war bigi bihan, 6500 en un devezh a glevis. A-boan kuitaet aodoù Libia e teuas bigi bras un ONG pe zaou, o tont eus Bro-Spagn d'o atoriñ³² ha d'o ambroug war-zu aodoù Italia, e-lec'h e voent sammet war bigi eus ar verdeadurezh-a-vrezel italiat, evit o c'has da Italia. Ne voe ket distrujet ar bigi libiat evit ober d'an trafik-se paouez, avat (Ouzhpenn-se ez hañval an traoù bezañ aozet mat en a-raok peb a jiletenn-saveteiñ a oa gant pep treuztiriad). Nann ! Distreiñ a rejont da aodoù Libia, evit sammañ ul lestrad nevez a dreuztiriaded a voe atoret evel ar re gentañ, hag ar mone-done da genderc'hel. 13000 'alouber' nevez a voe e korf ur sizhunvezh, a jedas ar meziennoù, met rener Europat ebet, war-bouez Viktor Orban ha renerion Polonia pe Slovakia, ne voe evit enebañ ouzh an trafik-se, aozet gant ONGoù kelledet gant aozadurioù bedelour evel *Open Society* ar miliardder yuzev-hungariat George Soros, bedelour daonet, a fell dezhañ erlec'hiañ poblañs Europa. Diskarget en Italia en em gavo buan a dreuztiriaded en tu all da harzoù Italia, ha ma tegouezh kant anezho ouzhpenn bemdez e Calais, n'eo ket souezhus. Ha d'am zro e lavaran : da betra e servij un arme, dreist-gourdonet, mar ne servij ket evit herzel ouzh hevelep alouberezh ?

Tiernvael

³² Atoriñ : *recupérer*.

N'eus ket a garantez hep fealded, hep kendalc'husted

“Ma-z eus unan bennak hag am c'har, va c'homz a viro...” (Yn 14)

Daoust ha bez' e c'heller c'hoazh reiñ ton d'ar fealded, hep lakaat da sevel mousc'hoarzhoù diskredus, a-wechoù ersavioù³³ a zistaol ? Bemdez-Doue, emañ an difealded oc'h ober al lu gant ar garantez.

Hep tamm morc'hed ebet, ne reer ket van ouzh ar gouestloù, dre zigendalc'h, dre fallgalonadenn, dre ezhomm da lavarout bezañ dieub, diereet, dreist-holl mard eo evit ur vuhez-pad.

Hogen an Aotrou Krist a c'halv ar re a fell dezho E heuliañ da ober un dibab, hep dont mui war o c'hiz. Ar gantroidigezh evit ur vuhez a-bezh, a c'houlenn kendalc'husted. Ur wech adkavet Doue, n'eo ket evit E goufonañ, d'ar c'hentañ trubuilh.

Skiant-prenet avat a zo ganimp holl : ar vuhez a ro tro dimp da amprouiñ ar fealded, derc'hel start daoust d'ar skoilhoù, gouzout petra a fell dimp, gallout padout. Rak dont a ra c'hoant da zilezel, da ziskregiñ diouzh... Diskregiñ diouzh ur mennozh, un uhelvennad, un oberenn, ur c'heneil... ur pried... Padout a-gevret, sed aze tra dic'hreadus, evit doare.

Evit kalz, padout a zo deuet da vezañ ur c'hur dibaot, dreist-diraez, pe un doare-bevan ermaez eus ar c'hiz, en ur bed ma-z eo kollet ennañ ar spisverkoù³⁴. Padout a seblant bezañ ur pal tu ebet d'e dizhout, en ur bed e-lec'h ma fiñv pep tra : ar mennozhioù, ar stuzegezhioù,

³³ Ersav : *réaction*.

³⁴ Spisverk : *repère*.

an divezouriezh³⁵. Hag, hiziv, kavout a ra dimp ouzhpenn ez eo bresk ar pezh a zo gwir, e teu da vezañ un ensavadur, ar pezh a bad, un ensavadur skornet, seizet.

An nep a lavar fealded a lavar dimezi, tiegezh, priedoù... Ha ne vefe ket, war an dachenn-mañ, ar fealded ar youl da vont donoc'h-donañ e-barzh un arnodenn a zarempred n'eus nemetañ, hep sellout ouzh egile evel un dra hag a vez stlapet kuit goude ober gantañ ?

Bezañ feal n'eo ket hepken kenderc'hel da ober jestroù relijiel gweladus. Da skouer, mont d'an oferenn da Sul. Seurt pleustradenn a zle bezañ ouzhpenn heberzhok³⁶. En em c'houlennomp enta perak e kendalc'homp da vont. En em c'houlennomp hag ez eo ar pleustr feal-se magus evit hor feiz.

Bezañ feal a zo ivez muioc'h eget chom feal d'un doare-bevañ kavet mat ganimp ha kavet mat ivez gant hor c'hevredigezh.

Tuet ez omp ivez da soñjal ez eo feal an hini a zo pennek, aheurtet. An hini a zo youl gantañ, hennezh a gendalc'h, hennezh a bad. Startijenn denel en deus. Imor en deus. Ur seurt kilpennerzh lorc'hus ha tagus enta. Se n'eo ket ar fealded wirion. Bez' ez eo houmañ, trec'h an Doue bev ennomp.

Youenn Troal

³⁵ Divezouriezh : *la morale*.

³⁶ Heberzhok : *de bonne qualité*.

Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Maneguen

J.C.Junker, penn-rener Komision Unvaniezh Europa, da heul ar Brexit, ha emsavidigezh kalz a bobloù en Europa (evel Hungria, Aostria, Kroatia...) en deus diskleriet : “An dra fallañ er bed eo ijinadenn an harzoù (etre ar broioù)”.

C'hoarioù Olumpek. Talgen « 100 % Jezuz » Neymar en deus talvezet trouz dezhañ a-berzh ar CIO (Kuzul Etrevroadel Olumpek) daoust ma oa echu al lidoù. Diouzh un tu all n'eus bet lavaret netra d'ar sportourezed a zouge pep a *hijab* e-pad ar c'hoarioù olumpek, evit ar wech kentañ.

Alamagn he deus goulennet e rafe pep tiegezh en Alamagn pourvezioù boued ha dour, e kenkaz e savfe freuz er vro. War-un dro o deus serret a-greiz-holl o harzoù ouzh an enbroerien aralleuropat dibaper. E 2015 ne oa ket ar memes kanaouenn avat.

Daou c'her a zo e latin evit kevyezhañ ar ger 'enebour'. Bez ez eus « *inimicus* », evit «enebour personel», hag ar ger « *hostis* », evit enebour foran, un dañjer evit ar gevredigezh. N'em eus ket kavet ar ger « *hostis* » en Testamant Nevez. En Testamant Kozh her c'haver avat. «*Inimicus*» a gaver stank en Testamant Nevez : gourc'hemenn a ra Jezuz deomp

karout an «inimicus», ha ne veneg gwech ebet an «hostis» eta. Gourc'hemenn ar garantez a zo ur gourc'hemenn evit buhez hiniennel pep den, met Jezuz ne-z a ket war dachenn ar politikerezh, da lavarout eo, ne bled ket gant aozidigezh pleustrek ar vuhez e par ar gevredigezh (an Iliz, da skouer n'emañ ket a-enep ar boan a varv nag ar brezel : an traoù-se a sell ouzh 'Kaezar'), ha dre-se ne veneg gwech ebet degouezh an «hostis», an enebourien foran. Er mare-mañ ez eus kalz estrenien a zeu tre en Europa dre laer, desachet ma-z int ar pep brasañ anezho gant Europa binvidik. A vilionoù ez eont da greskiñ enni bep bloaz, dre an enbroerezh hag ar ganedigezhioù, yoc'had ar vuzulmaned. Lod anezho, ur 15000 bennak e Frañs hervez ar pennadurezhioù er mizioù-mañ, a zo awenet muioc'h-mui gant kealiadurezh krenn o relijion, brezel feuls an Djihad. Emzalc'h ar Pab Frañsez dirak al lanvad a zo degemerus-tre, met oc'h ober se ez a war dachenn 'Kaezar', hep derc'hel kont eus ar gwirvoud.

E Calais, e korf daou viz ez eo daougementet niver an enbroerien aralleuropat dibaper, 10.000 bennak a oa e miz Eost e-keñver miz Mezheven. Ar Bolised a zo berzet outo dont-tre er c'hamp, emgannoù a vez etre an estrenien, ha tud varv a vez alies. Anzav a ra Polised 'zo ne gabestront ket mui an traoù, rak re niverus ez eo deuet an enbroerien dibaper-se da vezañ diwar-vremañ. Divizet zo bet kas ur mil bennak da rannbarzh Breizh, hep goulenn tra diganeomp.

E 2015 ez eo anv "Profed" an Islam **an anv-bihan a zo bet roet ar muiañ d'ar baotred e Kembre**, evit ar wech kentañ.

Tric'hementet eo niver an **Oferennoù e doare Sant Pi V (e latin)** en eskopti Kemper : ouzhpenn hini Brest-Sant Varzhin* e vo unan hiviziken e Kemper (iliz Sant Vazhev) d'ar Sul ha d'ar gouelioù da 11 eur, hag e Kastell Paol d'ar Sul abardaez 18 eur e chapel Sant Jozef. Gant Breudeuriezh sant Pi X ez eus e Gwipavaz, Straed Bruat Brest*, Traoñfeunteunioù Plouezoc'h, Chapel ar Mur Plouigno*, hag en Treoù-Kerne (*Anjelus e brezhoneg).

Pelec'h eo al lec'h nemetañ n'eus ket aotre da lidañ an Oferenn e Breizh ? E Kerzinen e parrez Gwinevez. An eil lec'h-pirc'hirinañ ez eo e Breizh war-lerc'h Santez-Anna-Wened avat : kalz tud vunut a Vro-Leon a ya di bemdez da bediñ, ha kirri-boutin a zeu a Vreizh a-bezh, ha zoken a Vro-C'hall : Dijon, Pariz, Normandi... E La Fraudais e Blaen n'eo ket anavezet an emziskouezioù kennebeut, met lidet e vez ingal an Oferenn eno, hep kudenn ebet.

Ur giladenn e-pad an Hañv : Betek-henn ar pried na labour ket a veze kemeret e karg gant skodennoù-kedskor he fried (pe e bried). Hiviziken ne vo ket mui ar pried na labour ket war anv Kedskor ar pried a labour, kemeret e vo e karg war-eeun. Met ar pried a labour a ranko talañ 8 % diwar ar c'horvoderioù nann goprel, gant un diskarg betek 10.000 euro. Se a zo kement ha kastizañ ar c'houbladoù e-lec'h n'eus nemet unan o labourat e-keit ha ma ra alies-tre ar wreg war-dro an ti (met ket dre ret). Un doare d'o lakaat da labourat kentoc'h eget ober war-dro er gêr evit mad an tiegezh.

François Baroin a zo bet dibabet gant Sarkozy evit bezañ maodiern kentañ, ma vez dilennet. Mestr-meur ar *Grand Orient de France* e oa bet e dad. E penn kevredigezh maered Frañs emañ ar mab, a-enep ar c'hrevier Nedeleg.

Anzavet en deus F. Hollande d'ar c'hazetenner Karim Rissouli e oa bet **ur milion a dud o tiskelañ a-enep lezenn Taubira**. Ar polis he doa roet un niver kalz izeloc'h : dre urzh e oa eta.

Banniel ar Manif evit an Holl (600 M2) a zo bet ledet dirak Kastell Kerampuilh Karaez gant Beilherien Karaez, ha skignet mat a-walc'h eo bet ar c'helou.

Georges Soros, pinvidig bras tost d'an tiegezh Rothchild, a ro arc'hant bras da frammoù prevez (lobbying) evit diskar al lezennoù "Pro-life" dre ar bed. Iwerzhon a zo unan eus ar broioù dikuliet sklaer gant Dcleak.com. Da heul e vo aesoc'h dezhañ lakaat ar broioù katolik all da blegañ.

Buhez hon Emglev

Emvod-meur EAT : Un devezh plijus e oa an emgav aozet e Kergreven Trelevenez, daoust d'an amzer fall. En em zigarezet o doa pemp tiegezh, dek bennak e oamp, ha d'an derc'hent e oa deuet ur familh all dre fazi ! Pellgomzet zo bet deomp eus Chicago... Gellet hon eus kendivizout war a bep seurt traoù, p'emañ ledan-tre tachenn-oberiañ Emglev An Tiegezhioù.

"**Stourm war bep tachenn**" a oa ger-stur Angela Duval, ur ger-stur a ya mat da saviad EAT. Evel un

"**Ostaleri a vro Spagn**" ez eo EAT, gant obererezhioù a bep seurt :

- krouiñ liammoù etre an dud ;
- sikour ar familhoù da gatekizañ o bugale ; evit kavout un Oferenn vrezhonek eo bet gweladennet hol lec'hienn 765 gwech abaoe 4 bloaz.
- stourm evit difenn an tiegezh hag ar Vuhez er gevredigezh ;
- embann ur c'hannadig a breder, a geleier ;
- embann levrioù ;

- Levraoueg ha diellaoueg EAT (emaomp o paouez lakaat war hol lec'hienn ur renabl eus ar pennadoù bet embannet er gelaouenn Barr Heol) ;

- skrivañ lizhiri d'ar pennadurezhioù (da skouer miz 'zo ul lizher d'ar CMB dre ma oa krog da c'hallekaat an talbennoù "Ao. Itr." war chomlec'h ar c'hontoù-bank.) ;

- moulañ paperennoù a bep seurt (Ar Bater e teir yezh, ar chapeled, imajoù evit kaout beleien, pegsunioù poubellennoù melen...) ;

- labourioù arbennik : levr katekiz evit ar vugale, ar Bibl, Liderezh an Eurioù ;

- implij ar c'halvezerezhioù arnevez evit pediñ e brezhoneg (strollad Hozana, 13 ezel war internet, levrig-pediñ) ; enrollet eo bet un nebeut pedennoù war gan gant Anna e-pad an devezh a zo skignet abaoe war youtube (klask : ["Feiz-ha-Breizh Evit an holl"](#))

- implij ar c'halvezerezhioù nevez evit en em stummañ ha skignañ filmoù bihan war youtube ; evit sevel lec'hiennoù a ziforc'h evit ar Bibl hag Imbourc'h (ti-embann) ;

EAT a rank bezañ un diazez gwevn-tre evit an izili a glask kas war-raok ur raktres bennak, da skouer ez eus bet anv gant unan eus aozañ un devezh e Gwengamp e koun Maodez Glanndour. Pouezet eo bet war ar fed e c'hell forzh peseurt ezel goulenn dont er c'huzul merañ evit kas war-raok ur chanter a fell dezhañ pe dezhi kas war-raok gant sikour diazez ar gevredigezh. E berr gomzoù, un dachenn ec'hon eo hini EAT, bras-divent eo an ezhommoù, ha pep hini a c'hell kemer perzh, hervez e zonezonoù, an amzer a c'hell gouestlañ, ha dreist-holl e c'hoantoù.

Komzet 'zo bet ivez eus Kanerion an Naoned, eus dazont Kristenion Breizh evel ur Vreuriezh a bedenn hag a studi da zerc'hel start da hennadelezh katolik

EAT, eus an diouer bras-tre a veleien brogarour, eus an darempredoù gant eskopti Kemper. E Santez Anna Ar Palud hon eus klevet eskob Kemper o lavarout : *"Dizemglev a welan war boent an doare-skrivañ"*. Evit gwir e vije reishoc'h lavarout n'eus ken e Breizh, nemet tud 'zo, nebeut-tre, hag en eskopti Kemper nemetken, na reont ket gant an doare-skrivañ boutin, daoust da urzhioù sklaer Roma war ar poent resis-mañ gant afer ar Misal.

Divizet 'zo bet kinnig bep bloaz ur biric'hirined bennak d'an izili.

Prientadur ar Bibl a ya war-raok war e bouez. Chom a ra notennoù da ouzhpennañ gant sikour Araud Demouch, hag adwelet e vo an Testamant Nevez en ur dennañ hor mad eus leksionalioù Klerg evit al liderezh, da gaout ur Bibl liderezhel. Evit al liderezh eo mat-tre troidigezhioù Marsel Klerg an

holl a oar an dra-se er gomision etreskoptiel. Sekretour ar gomision, avat, a zo ivez kañseller eskopti Kemper en deus skrivet deomp da lavarout ez eo difennet ouzhip moulañ ur Bibl hep aotre an Iliz, peogwir ez omp katoliked. Kement-se a vir er pleustr ouzh ar vrezhonegerien da gaout ur Bibl evit an amzer vremañ, bet renevezet gant beleien gatolik da heul kavadennoù Koum-Ran. An dalc'h eo n'hon eus mui-ni, e brezhoneg, tud barrek a-walc'h war ar Skritur Sakr evit adober al labour-treñ penn-da-benn, diwar an hebraeg pe ar gresianeg, evel m'o doa graet Pêr ar Gall, Job Lec'hvien, Maodez Glanndour ha Marsel

Klerg. Met gwir eo ne oa ar pevar beleg-se gallaoued evit ur blank. Abaoe 4 bloaz eo bet digoret pajenn «Bodad ar Bibl» hol lec'hienn 1401 gwech.

Echu eo troidigezh al levr katekiz : e bourchas a c'hellomp dindan pdf evit ur bennozh Doue d'an neb a garo : 230 pajennad skeudennoù e liv, stumm A5.



Mererezh :

16 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tieghezioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X